

KIS-710 – Bredkleñved ha buhez speredel

(JE da GE – 27 02 01)

Daoust hag e c'hall un den a vez o c'houzañv trubuilhoù bred kaout ur vuhez speredel kristen diles ? Un argraf hemañ enta hag eñ war ar vevenn etre bredoniezh ha kravez.

(GE da JE – 02 03 01)

Amjestrat aters a glaskin nesaat outañ o vont dre dachennoù eeunoc'h.

Hag un den gant strafuilhoù en e weled a c'hell bezañ livour ? GRECO a ro ar respont, eñ en doa ur gwelerezh kleñvedel. Ha moarvat e-touez an arzourion e kaver tud a vez krouerion diles hag int nammet en arc'hwelioù end-eeun a embregont en o arz. Diaes gouzout ar perzh en devez o namm er berzh a reont.

Diaesoc'h c'hoazh kaout ur mennoz pa vez anv a strafuilhoù bred. Kudennek eo keal ar reol a-fet bred : petra zo bonan ha petra zo kleñvedel ? Ar vredkleñvedouriezh zo un diskiblezh nevez (a-vec'h muioc'h eget kant vloaz eo) ha gortoz a ra bepred un diazez skiantel. Evit diskleriañ ez eo kleñvedel an doare-mañ doare a stadont e realezh ur gouziviad — kentoc'h : evit divizout hag un dra bennak zo d'ober evitañ — ez ersav ar vredvezeion evel mezeion moarvat, dre zerc'hel kont eus laur an den hag eus ar goulenn a ra bezañ diboaniet, nemet ez erdroont ken alies all ouzh selledoù anvezegel : ha nasket emañ ar gouziviad en e frankiz ? ha techet eo da vonedigezhioù enep an divezouriezh pe al lezenn ? hag emell ar mezeg e buhez e arval, mar gantreizh ve hiziv, ne anado ket warc'hoazh evel euverus ? Da skouer e c'hoarvez d'un neuroz, endra vir da gentañ ouzh un den a ren e vuhez, dont da vezañ un dachenn c'hourdonañ hag ur c'heflusker d'e labour war hiroc'h termen.

O vont nesoc'h d'ho preder hag o komz dre skiant prenet : ne 'm bez nepred kavet ur bredklañvour, pegen tizhet bennak ma ve, a ve dic'hallus kaout un darempred denel diles gantañ. Emaomp aze en un domani nad eo ket hini ar skiant ha ne glaskin

ket reiñ un displegadur ; dre ul leterc'had ez in o lavarout e soñjan e vez e mab den donderioù — pe andonioù — o chom dalc'hmat e-maez pep drasterezh.

Evezh hoc'h eus taolet da glokaat : ur vuhez speredel *kristen*. An dave a rit d'ar C'hrist ne c'hell ket na vont betek ar bromesa a reas, gouez da Yn 12, 32 : “Pa vin savet a-uhel e tesachin an holl¹.” Anv hor boa graet, TAM ha me, eus div droidigezh ar bomm-se : “[...] an holl dud” pe “[...] an holl draoù”. Bezet pe vezet, an holl dud pe an holl draoù, ne c'hell ket ar vreklañvourion bezañ ezlakaet !

¹ “Ha me, pa vin bet uhelsavet diouzh an douar, eo an holl dud a dennin davedon” (*Ar pevar Aviel*, tr. dindan renerezh Maodez GLANNDOUR, Al Liamm, 1969, p. 248). Sl. ivez KIS-315, La-08, pp. 240-242 ; hervez an dornskridoù e kaver daou askenad diouzh ma lenner *pavnta* “an holl (dud)” pe *pavnta* “pep tra”.